

196

Koat an nay.

(f. 9)

Pa vezan (1) bemdez e vond dam skol
E vez va mestrez e tall e dor.

Haq hi e lavaret ken ardant
Dibonjour deoc'h va dousik koant.

Doc'h ar c'homzo a leveret
Va godissa eo a ret.

Neket ho godissa eo a ran,
Kousket ganec'h a zeziran.

Deud gant ar Markis Koatanne
Dam goulen digant va ligne.

Dam goulen digant va ligne
Ne veet ket refuset men toue.

Dibonjour dec'h markis Koat an nay.
A deoc'h ive va breur mager.

Deud tu ganeme da Crec'hgoure
Da houlen ar penerez ahane
Ne viot ket refuset e men toue.

Va breur mager c'hui e voaz er vad
An dra ze ne ve ket gred mad.

Perc'hen pem mil skoët a leve
A lignez nobl a galite

(f. 10)

— Rentet tu dime va mado

(1).- Vezan, correction de: Voan ?

197

A baoue ma ze va zud maro .

Breman pa zeo ed va zud gant Doue
Me ze mest d'ober va bolonté .

Da kemeret va santimant ,
An den man pa ze kontant .

—
)

Jannet Puill 9 fev: 1851.